


## Tabut ar WebNoz




## Lennegezh Breizh

A-benn disadorn e vo gouvezet gant peseurt skrivagner brezhoneg 'c'h ay ar **Priz Sten Kidna**, kenaozet gant kumun ar Bonoù ha Kerlenn Sten Kidna. C'hwec'h romant zo war ar renk. War-eeun 'barzh WebNoz e vo roet ar priz-se !

War ar renk : *Etrezek an Enez*, Mich Beyer ; *Avel Gornôg*, Yann Bijer ; *Seks ha fars*, Jean-Christophe Bozec ; *Koulz ar c'hastrilhez*, Herve ar Gall ; *Tonkadur kriz Tom Bruise*, Yann Gerven ; *An Deiz hirgortozet*, Gege Gwenn.



**Fañch Broudic** a zeuy ivez da gontañ deus e levr nevesañ : *Qui parle breton aujourd'hui ?* (Brud Nevez), un enklask war ar vrezhonegerien a-hirie hag ur sell war dazont hon yezh...



## Muzik

**Didier Dreo**, gitarour a-vicher, bet er strollad Kern un toullad bloavezhioù zo, a labour ingal gant Nolwenn Korbell. Disadorn e sono asambles gant Lannig Libouban, er WebNoz, tonioù tennet deus e bladenn *Kerdin da zirostañ*, bet priziet gant an Telegramme e 2007.



**Kentañ WebTv 100% brezhoneg** eo brezhoweb. 35 eurvezh programmoù nevez a vez kinniget war ar chadenn bep bloaz : talk-shows, tresadennoù-bev, sitcoms, filmoù... Skoazellet eo brezhoweb gant Rannvro Breizh ha Kuzulioù-meur Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan.

War 2 lec'hienn e vo skignet an abadenn war-eeun : [brezhoweb.com](http://brezhoweb.com), [armortv.fr](http://armortv.fr)

**KASIT HO SOÑJ, HOC'H EVEZHIADENNOÙ DIOUZHTU WAR BREZHOWEB.COM !**


## Le débat de WebNoz



### Littérature en langue bretonne

C'est ce samedi que sera remis le **Prix Sten Kidna**, organisé par la municipalité du Bono et Kerlenn Sten Kidna. Six romans sont en lice. La remise de ce prix aura lieu en direct lors de la WebNoz !

Les nominés : *Etrezek an Enez*, Mich Beyer ; *Avel Gornôg*, Yann Bijer ; *Seks ha fars*, Jean-Christophe Bozec ; *Koulz ar c'hastrilhez*, Herve ar Gall ; *Tonkadur kriz Tom Bruise*, Yann Gerven ; *An Deiz hirgortozet*, Gege Gwenn.



**Fañch Broudic** viendra commenter la matière de son dernier ouvrage : *Qui parle breton aujourd'hui ?* (Brud Nevez), une enquête sur le nombre de locuteurs bretonnants aujourd'hui et l'avenir...

## Muzik

**Didier Dreo**, guitariste, qu'on a connu dans le groupe Kern il y a quelques années, travaille régulièrement avec Nolwenn Korbell. Samedi, il jouera pour la WebNoz, avec Lannig Libouban, quelques morceaux extraits de son CD *Kerdin da zirostañ*, remarqué et primé par *le Télégramme* en 2007.



Brezhoweb est la **première WebTv 100% en langue bretonne**. Elle propose 35 heures de programmes frais par an : talk-shows, dessins animés, sitcoms, films... Brezhoweb est soutenue par la Région Bretagne et les Conseils Généraux du Finistère, des Côtes-d'Armor et du Morbihan.

L'émission sera diffusée lors du direct sur 2 sites : brezhoweb.com, armortv.fr

**ENVOYEZ-NOUS VOS COMMENTAIRES TOUT DE SUITE SUR BREZHOWEB.COM !**